

Dornskridoù Milin : Kanaouennoù

8. LOIZA /HAG ABALARD/° ° hag Abalard a zo bet
diverket gant Milin e-unan

Gwechall pa oann bihanik er guer e ti va zad
evit eur plac'h seitek vloaz me a ioa desket mad
Me ouie kana r prefas koulz hag ann ofern bred
ha konsakri hostiou koulz ha belek ebet.
- Livirit din plac'h iaouank pa zoc'h a galz desket
C'houi anavez al louzaouen pini awan ann ed ?
- Lagad kleiz eur marvran ha kaloun eunn tousseget
ann ad diwar ar raden noz gouel ian dastumet
mac'h hadiz va louzou
Kenta ma riz sorcerez da c'hout hag he oa mad
parkad
oa enn eur mesiad segal er gear e ti va zad
eat ioa
a ioa eat d'he hada triouac'h poezellad vad
pa oent diwanet
noa bet diwar n ezho nemet triouac'h skudellad
Me a meuz eur c'hroufik bihan er gear e ti va zad
neb a zigoro anezhan en dezo kalounad
zo enghan teir aer viber o viri eur serpant
Mar teu va zerpant braz e vezo nec'hamant
eo e vez hen bevet
neket euz a gik klujar /ken nebeut kevelek/
nemed gant goad bugale kent beza badezet
enn eur c'horn euz eur park kasit va c'hroufik bihan
C'houezit tan war nezhan tec'hit pell diout han,
Me ia brema d'ar maro p'oun dar maro barnet
goude va fallagriez emeuz hen dellezet.

(dindan an darn-mañ, penn kentañ un eilstumm all
eus ur skritur disheñvel sklaeroc'h he liw, bepred
a-berzh Milin):

Kenta ma ziz d'ar studi da zeski ar gallek
Me ne ouien ger doue nemet ar brezounek
brema me oar gallek ha c'hoaz skriva ha lenn
ha c'hoaz miret oc'h eur belek da laret he ofern
- Na plac'hik pevarzek vloaz na din me leveret
gant piou ez hoc'h hu bet koulz kelennet ha desket
- Na gant eur c'hloarek iaouank a gichen ti va zad
e oe desket din me ann drouk eleac'h ar mad
ennhez ma c'hase gant han na bemnoz d'ar zabad
Kenta ma ziz d'ar zabat me a oe braz souezet
o velet ar zorcerien hag ar zorcerezet.
